

223

CANTIQ

VOAR BUEZ SANT ERVOAN

Selaouet oll quitibuan
Buez an Antrou sant Ervoan,
Buez sant Ervoan Heloury ;
Disquet-hi oll, me o suppli.
Ganet eo bet dre chraç divin
Er Maner deus a Guervardin,
En quichen ar guæra Dreguer,
Voar dro eur c'har leo dious kær,
He dad voa hanvet Heloury,
Hac e Vam Asor ar Plessy,
Tud Piviq hac a gante,
Had o defoa doujanç Doue.
Quent evit ma vije ganet,
D'he vam Asor voe revelet
Penaus ar buguel a dougue
A vige eur Sant bras un de.
Pa voe ganet na voe quent pell
Na eure guelet. en buguel,
E voa d'ar vertuz destinet,
O vezan douç, humbl ha parfet.
He dad ac e vam, heb jale,
En discas da garet Doue,
Ac a roas ear mæ-tr dezan,
D'en disquin da leo ha scrivant
Gante, e sanchoat d'e buguel
Eur berceptor tur ha santel,
Pehini a d'escas nubun
Al latin d'ho mabie Ervoan,
Profitan a re assambles
En study hac e santelez,
Bepret ous en em occupin
O studian hac o pidin.
Pa voa e bevarsec c'bloas oaget,
Da Baris a c'hoantas monet,
Dre ma cleve e voa enno
E fleurisse squiencho.
Er guær-man e eure guelet
He santelez hac he speret ;
He speret caër o surpassi
Ar re voa gantan er study.
Graet gantan he philosophi,
E ticas an theologie ;
Goude se c'hoas ar guir-canon
A zistibue pervedion.
Obeï a re guelet ive
Ar santelez deus e vue ;
Ne zebre tan bara guinis,
Mæs b'ra heyz. pe bara gris.
Ar c'hic, an uou, ar p-squet,
A ve voar he daul servichet

A zistribue pervuan
D'ar bevien yac'h ha da re glan.
Pa voa pevar bloas varnugent,
Savant bras ha leun a souient,
Ec'h æs c'hoas, vit en em avanç,
Deus a Baris da Orleans.
Enon gant eun doctor habil,
E tiskas c'hoas ar guir civil
Evit jujin, gant justiq vad,
Pep sort proces ha peb débat.
Er guær-man e renonças crenn
D'ar c'biq d'ar ghin evit biquen,
Hac a consacras e vue
Da servijin parfæt Doue.
Ar brivæl a recite
Hac offiq ar Verc'hes bemde ;
Ouspen yun a re pep guær.
En honor da varo hon Salver.
Gout a re penaus ar squient
Na hell quet reutan an dud sænt,
Ma na unissont assambles
An œvrou mad gant o furnez.
He study gantan achuet.
Da Official voe lequeet.
Da guær ilis en Raon,
Gant Mardic an Arreagon.
Escop Treguer, neubeut goude,
Informet deus e vue,
En pedas da zont davetan
Dre un instim bras evitan.
Ar Sant, dre humilite vras
D'he escop a obeissas.
Recev a ræs gant santelez
An urzæc a veleguez.
An escop en eure ractal
Barner, ilis Official,
A ro dezan incontinent
Parous Tredrez a voa vacant.
Un neubeut goude quement-man,
E roas Louanec dezan,
Dre ma voa eur barous carguet
A viçon fall, tud direglet,
Mæs Sant-Ervoan, gant fervans bras
Ar bopl paour-man a instruas ;
O preseq. o catechisan,
E chanchas crenn ar barous man.
Pa voa barner, ec'h angaje
Li-s a vech dre charite,
Ar bartiou da accordin,
Da chom en peuc'h, ha hep plædin

Ha pa renque rein eur setanç,
En roe just, en consianç ;
Jugin a re herve Doue,
Hep egard da hep qualite.
N'en de quet hepquen da jugin,
Mæs dont a re c'hoas da bliedin
Evit ar prour en donæson,
Bars en ped juridiction.
Ma care'r justic so 'breman
Ober evel ar barner-man,
Ve quet quellies commettet
A injustiç hac a bec'het.
Mar boa parfæet den a justic,
Parfæet oa c'hoas den a illis ;
Na glasque nemert gloar Doue,
Ha di-quin d'an oll hent an êe.
Lies a vech e presegue
Peder vech er memes de,
Ha seiz guech, ur Guener-ar-Groas
Ar Bassion a presegas.
N'en de quet hepquen da breseq
Er Tredrez hac e Louanec,
Mæs er paroujou all voar-dro
Ha dre Vreis en escoptyo,
Graç Doue, dre he sarmoniou,
A douch an oll calonou,
Ar re d'ar bec'herien brassan
Donet d'en em gouvertissan.
O vent da dursiq, e gavas,
Eur post cololet gant doue bras,
Mæs an deur a arretas creun :
Evit en lesel da dremen.
Quer bras voa e devotion
Ma fonte casi he galon
En he oræson en illis,
Ha pa offre ar sacrific
Glebian re lies he diltad
Gant an doërou'n daoulagat,
Pa zeue d'en em breparin
Quent evit dont da celebrin.
Eur vech en pad he oferen,
E voe guelet a us d'he ben
Eur flammen dimeus an envou.
Queit a ma voa er goureou,
He ty a voa ty ar bevien ;
Deut mad a voant : hep refus den,
O loja re hac o guisquin,
Pa rein deze boëd dida brin,
Eur vech roet d'ar bevien
He oll ed hep manuel greunen,
Dre eur miracl, en em gavas
He c'hriguel leun eus a ed craz
Eur vech all c'hoas n'en defoa
Nemert eur guennegad bara,

Hac en dont d'en distribuin,
Hep miret un tam da zibrin
Chom a eure bara gantan,
Quement evel quent, da droc'han
Goude bezan rassasiet
Cals a beurien affamet.
Chanjet, tud avaricius,
Beet ous ar paour truezus ;
Guelet pegument ez eo mad
Doue ous an dud charitabl.
En voa tad an orphanet,
Protectour an itanvezet.
Souten an oll dud ezomus,
Ha confort ar re birtoudus.
Mad voa ar Sant ous peb unan ;
Nemert ous e gorf e unan ;
En cara re hac en træti
Evel he vrassan ennemi.
Eur rochet reun a dougue
Voar he gorf santel nos a de ;
He velet eur gleud quevoet,
Hac ar Bibl s'er voa e bluec.
Bemde en em zisciplin,
Ha casi bemde a yune,
Na deue da dibrin jamæs
Bara guen, na quiq, no frouez.
Erfic ar Sant zo decedet,
Pa he hanter-cant bloas oage
Gac haret bras voe tud ar vro
N'eo deuet d'ar d'ar d'ar d'ar
Quement a babl a tisite
Ar c'hoas dre eus an den Doue,
Ma chomas tri de exposet
Hep galfout bezan interret.
Marvel eo bet en Kervarzin
Ar Sant leun a c'braçou divin.
Er c'hoas dre al voe interret
He gorf santel gant pep respet
Er bloavez tri ha trizec tant
Eo bed decedet ar Sant,
Dre he viraciou eo bet
Neubent goude canoniset.
Pobl a Tredrez a Louanec,
Beet devot d'ho person bepret ;
Er E vou eman o pidi
Evidoc'h hac an escoptyo
An oll Sant e voan biniget
So an êe a c'hoas garmet
Evel garmet a nos garmet
Dious pep droug a hep andri
Obtenet d'emp digant Doue
He doujanc hac e garante,
Ar c'hoas d'en servijin er vad,
Di gavet oil eur maro mad. — Amen.